

# KAN SOUDARDED BREIZ-IZEL

TON : *Emgann ann tregont.*

DISKAN :

Soudarded kristen Breiz-Izel,  
Kanomp betek heur ar maro :  
Holl' ato ni' stourmo fidel  
Evit Doue, evit hor bro !

1.

Karet ar vro, karet Doue,  
Setu bepret henor Breiz ;  
Hag hirio ker braz karante  
'Zo birvidik enn hor c'hreiz.

2.

Hor c'herent evitho guechall  
A skuille kalounek ho goad :  
Goulennit ouzomp kement-all,  
Laoüen e vezo pep Breizad !

3.

Nan, biskoaz hor pennou kalet  
N'o deuz ket bet aoun rag netra ;  
Mez 'ni fell d'eomp, guir soudardet,  
E ve Doue mestr da genta !

4.

Ar c'hristen, a zervich he Zoue,  
'Zo bepret ar güella soudard :  
Dezhan ni' ginnik hon ene,  
N'e ket hor c'hiz beza trubard.

5.

Pedi, kovez, kommunia,  
A reomp aliez eüruz er gær :  
Enn arme perag argila ?  
Hor banniel eo kroaz hor Zalver.

6.

Ann offerenn da zul, da c'hoüel,  
Ato 'zo bet hon levenez ;  
Ma z'euz tud ouz he dilezel,  
N'ho c'hlasit ket enn hon toëez.

7.

Siouaz ! 'vit al lezenn gristen  
Marteze' ni 'vo tamallet ;  
Mez biken hon enebourien  
Ne drec'hint breudeur unanet.

8.

Aliez ar mor kounnaret  
Spountuz ouz ar garrek a sko ;  
Ar garrek n'eo ket dispennet,  
Stard ha kalet e chomm ato.

9.

Dirag holi-kounnar ann dud fall  
Ni chommo stard 'vel ar garrek :  
Daou vignoun ker 'voar hon diouall,  
Hon æl mad eo hag ar belek.

10.

Ho pennoz d'eomp, Doue santel,  
Ho pennoz araok kimmiada !  
Evit soudarded Breiz-Izel  
Kaout ho pennoz 'zo kaout pep tra !

IMPRIMATUR :

*Quimper, 28 octobre 1887.*

SERRÉ,

Pro-Vicaire capitulaire.